

Kaniri Breiz-Izel



# Matilin an Dall



Editions TONTON PHILE

Imprimerie Louis Eoclé, 40, Place Thiers, Morlaix

# Matilin an Dall

Breizis va Chen-ve. is. k.  
 ret, Ki. ris nou. as me a zo  
 Koz ag a bet gwache meuz so.  
 net da zan. sal en diez hag an  
 noz' ha mar plij gant san. lez an.  
 na e kle. vich e hoag var an da.  
 chen son Skiltus va bougr. Gard ve.  
 len o la. Kat tud hor Breiz da  
 di. da Me eo Ma. ti. lin an dall  
 ag bonn. Garder kaouen a la. Ka'n d'ud.  
 da zan. sal Di. var va bar. ri. Ken Eun taol d'ud!  
 ha sou. den Po. tred skand. an a ba. den Eur bougr. sou  
 ha var. tal Po. tred o fin. gal. ge

Breizis, va c'henvrois karet,  
Hirio siouas me a zo koz  
Ag a bet gwech e meuz sonet  
Da zansal en deiz hag an noz,  
Ha mar plij gant santez Anna  
E klevoc'h c'hoas var an dachen,  
Son skiltruz va bombard velen  
O lakat tud hor Breiz da drida.

#### DISKAN

Me eo Matilin an dall  
Ar bombarder laouen  
A laka'n dud da zansal  
Divar va barriken :  
Eun taol sut ! ha souden  
Potred skanw d'an abaden,  
Eur boum soun, ha ractal,  
Potred o fringal ! gê.

laouank e kollis ar gweled...  
An eostik, ma lavarer mad,  
A gan flourroc'h e'n he gaouet  
Pa vez dallet e zaou lagad :  
An dall a gaerik Kemperle,  
E n'he lochen var ribl an dour,  
Evel an eostik a zon flour  
Etre an Izol hag an Elle.

Iannik-ar-Japel, em c'hichen,  
A c'hoari gant he viniou,  
Dreist holl pa zun bord e veren  
Evit souplat e vuzellou  
Nag hen a sko, Iann va c'homper,  
Gant he zounerezik lirzin  
Ha d'he heul pa sko Matilin  
Eo fars guelet penaos e fringer.

Bet oun e Paris, eun devez,  
O sini dirag ar Roue  
Hag hen kouls ha tud e balez,  
Gant ar blijadur a c'hoarze,  
A c'hoarze krenw, a c'hoarze pell  
Hep gallout miret da c'hoarzin  
O klevout an dall Matilin  
O tistaga toniou Breiz-Izel.

Malo-Korred a Gear-Ahez,  
Kenta grenadour a Vro-C'hall,  
A veritas klevet ivez  
Sounerez Matilin an dall  
A dost, a bell e tiredet,  
Da velet patroum ar soudard  
Ha da glevet mouez va bombard  
O kana enor ar Vretoned.

Kals all a vije pinvidik  
Ha gant-hen-me ne jom netra  
Nemet isign va bombardik  
Da c'hounid va zammik bara.  
Mez a ze pikol fors ne rann ;  
Me zono keit ha ma vevin  
Ha deiz va maro na gollin  
Nemet va bombard a va ziskan.

J. QUÉRÉ.